



## Nijal a ra an dube

Fichenn savet gant Silvenn Koant

### Evit piv?

Adalek ar RV en ur c'hlas pe get

### Talvoudegezh ar c'hoari

mestroniañ e gorf

### Pal ar c'hoari

Enebiñ ouzh arouezadurioù rener ar c'hoari hep faziañ

Ar penn c'hoarier a lâr : « nijal a ra an dube » en ur sevel e vrec'h. Ar c'hoarierien a sav o brec'h ivez. Kenderc'hel a ra ar penn c'hoarier : « nijal a ra ar gelienenn, ar c'harr-nir, ar morbig, ar vran, ar sarpant-nij » . Bep gwech e sav e vrec'h. Ma lâr un dra ha na nij ket, ar c'hoarierien n'o deus ket da sevel o brec'h, ma ra ar penn c'hoarier zoken.

Goude ur pennad c'hoari, an hini en deus faziet an nebeutañ a zeu da vezañ penn c'hoarier d'e dro.

### Evezhiadenn

Gwelloc'h eo chom hep argasiñ an dud.